


XXII

GWERZ AR BASSAJEREZ
(Complainte de la Passeuse)

- Plac'h et tu passajerez gand ho pagic bihan
Gand ho pagic bihan
D'en on riskañ war ar mor, évelzé hoc'h unan (*bis*)
- Ho pagic hag ho kened zo ken skedus ha koant
Evel eur binikiouer, a ve aour pe arc'hant (1)
- Me zo eur vinorezig oajed a bemzeg vla
Hag am euz kalz da zival c'hoarfé gané netra
- Eur plac'h defe ar walleur na de goll hec'h inor
Ve noazuz dirag Doué, disprijet gand an oll.
- Ha goudé ve diweet de donet de welañ
An inor pa vé kollet n'hallar ked hin prenañ
- Ne ket vit koll hoc'h inor nag ié ho kwerc'hdet
E teu d'i mé plac'h iaouank da gomer liberted
- Rag mé zo eun den iaouank a gar beañ secret
N'a n'ouzon ked ar féson da c'hodissa'r merchet
- Rag zé ta ma Ijabell, ma douz, ma c'harante
'Non embarked en ho pag ha ma hisset ié
- Abarz eur pennad amzer ni vo hon daou contant
Na de veañ unisset gant Roé ar firmament
- Me ho ped ma servijer, pa vét n'ho karnizon
Da skrivañ dign eul lizer deuz a greiz ho kalon
- Poan arri èn La Vendée lac'h m'em ma de vonet
Ha mé skrivañ eul lizer d'am gwir muiañ karet
- An adress deuz ma lizer am moa roet d'am zâd
O sonjal ober gwellañ ha n'em ma ket gret mat
- Na kaer am moa mont bemdé da Bost al lizero
Ne gleven deuz ma mestrez, nag a nep seurt kelo
- Ne gleven deuz ma mestrez, nag a nep seurt kelo
Arri e oan da zonjal penoz e oa maro
- Pa'n arriiz ti me zad, hep dibi nag evan
E oa doaré ma mestrez a c'hontiz de gentañ
- E oé prest d'in respontet gant tud deuz ar c'hontré
Dimeet è da vestrez n'en euz ke pell aboé
- Mar gé dimêt ma mestrez, n'en euz ke pell aboé
Oh na tepet ma zabren zo ouz ma c'hosté klei
- Oh na tepet ma zabren zo ouz ma c'hosté klei
Ha plantet han 'n em c'halon n'euz forz pegen lemm è !

Le sujet de cette balade a donné lieu à une version assez différente qui a été publiée par Le Goffic, à Lannion. Elle porte pour titre : « Chanson nevez war sujet eur bassajerez hag eun den iaouang ». Elle comporte des strophes de 4 vers et l'air si joli que nous donnons sous le n° 23 ne peut s'y adapter.

Air n° 23.



Plec'h et hu pas-sa-je-rez, gand ho pa-gic bi-han, gand
 ho pa-gic bi-han ; d'en em riskan war ar mor e-vel ze hoc'h u-
 -nan, d'en em ris-kan war ar mor, e - vel ze hoc'h u-nan.

(1) *benkiouer* = « bénitier » hervez Bourgeois (A.).